

## D'ar 5 a viz Gouere

- Er IV<sup>re</sup> kantved, e Siren e Libia, da vare Diocletianus, merzherenti **santez Sipuril** a zifennas he gwerc'hted e-kreiz un hir a vouerevezh kriz.

Derc'hel a reas un dornad glaou bev mesket gant ezañs bet lakaet en he dorn evit lakaat da grediñ he doa asantet kinnig an ezañs d'an arrizoù. En diwezh e voe roget he c'horf hag en em ginnigas kinklet gant he gwad d'he fried doueel.

- Er V<sup>vet</sup> kantved, en Armenia, **sant Domes**, lesanvet **ar mezeg**, penitiour war venez Qouros.

- War-dro 1004, war vMenez Atoz, **sant Atanaz an Atonid**, abad uvel ha hezleun a ziazezas el Lavra Vras ar vuhez kenvez gant logelloù nes d'an iliz.

- E 1539, e Cremona en Italia, **sant Anton-Mari Zaccaria**, beleg.

Doazhour war ar vezegniezh d'e zaou vloaz warn-ugent, ez eas da veleg hag e tiazezas evit adreizhañ buhezegezh ar feizidi Kongregadur Kloer Reoliek Sant Paol. Dre ma servijent iliz sant Barnabaz e voent anvet da c'houde Barnabazed. Mervel a reas da c'hwec'h bloaz ha tregont goude ur vuhez santel ha skouerius.

- E Breizh, war-dro 535, **sant Meurzh**, beleg, penitiour, mignon sant Maelan, ganet ha marvet e Baez nepell diouzh Gwerc'h-Breizh e Bro-Roazhon lec'h m'eo bet beziet.

- E Breizh, moarvat er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Gwehen pe Gwihen**, manac'h, patrom iliz Landehen, enezennad Dol e Pentevr, nepell diouzh Lambal. Kv (gl) Pleudihen ; Gichen

- E 1661, distro da Zoue ene **an Tad Erwan Alam**, genidik eus Beuzeg-ar-C'hab e Kernev, karmezad, misioner e Bro-Siria en em roas a-grenn da zistro an disivouderion ha da weladenniñ ar re glañv.

- E 1882, **ar bac'hiadez Gabriela Yaudet**, pirc'hirinez ha kevrinourez, ganet e Lannuon en un tiegezh pesketerion ez eas war droad da Roma lec'h ma voe degemeret gant ar Pab Pius IX. Prestik goude he distro ez eas da Jeruzalem lec'h ma chomas penitiourez war Venez an Olived ha lec'h ma varvas ha ma voe sebeliet gant leanezed Sion, gwisket giz Bro-Dreger.

- Er VI<sup>vet</sup> kantved, **santez Stezan pe Stezian**, maouez santel a Iwerzhon a savas un iliz (bremañ Stithians) e Kernev-Veur.

- En Iwerzhon, **santez Edin**, maouez santel.

- En Iwerzhon, e 1581, da vare Elisabeth I<sup>añ</sup> a Vro-Saoz, merzherenti **ar wenvidion Mazhev Lambert, Roberzh Meyler, Edouarzh Cheevers ha Padrig Cavanagh**.

Pesketour e oa Mazhev ha martoloded e geneiled, anezho holl eus eskobiezh Ferns. Dre ma oant chomet feal d'an Iliz Katolik ha dre m'o doa skoazellet feizidi heskinet e voent barnet d'ar marv, krouget ha toullgofet e Wexford.

## D'ar 6 a viz Gouere

- En III<sup>de</sup> kantved, merzherenti **sant Tranquillinus**, uheliad roman eus un tiegezh senedourion. Gonezet e voe d'ar feiz kristen goude merzherenti e zaou vab gevell ar sent Marcus ha Marcellianus, war-dro 286. O bez dezho o zri a voe dizoloet e 1782 e Roma n iliz ar sent Kosma ha Damiano e-kichen bez ar pab merzher Felis II.

- Er IV<sup>re</sup> kantved, **santez Makrina**, abadez, patromez gwern Piktavia. Deuet e vije gant he c'hoar Colomba eus Spagn o tec'hout rak an heskinadurioù hag e savjont gant santez Pezhenn ur manati bihan e-kichen Niort. O tec'hout rak un uheliad eus ar vro e kavjont repu e Magné.

- Er bloaz a c'hras 700, **santez Sexburga pe Seaxburth**, abadez Ely e Bro-Saoz. Merc'h Anna, roue Angled ar Reter, c'hoar santez Etheldred (Ediltrud), santez Ethelburga, santez Wilburga, sant Erconwald, eskob London, hanter-c'hoar santez Sebrida. Dimeziñ a reas gant Erconbert, roue Kent hag e voe mamm Egbert ha Hlothere, rouaned Kent, santez Ermenilda, abadez Enly ha santez Eorcengota, manac'hez e Faremoutiers e Bro-C'hall. Goude marv he gwaz ez eas da vanac'hez. Diazezañ a reas manati Minster war enezenn Sheppey a-raok mont da gaout he c'hoar Etheldred en abati Ely lec'h ma voe abadez war-lerc'h marv he c'hoar.

- E 1902, **santez Maria Goretti**, gwerc'hez ha merzherez, lazhet e Nettuno en Italia d'he daouzek bloaz dre ma fellas dezhi mirout he gwerc'hded.

- E Breizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **santez Nolwenn** (Noal), gwerc'hez ha merzherez, genidik eus Devnon tramor (Kernev-Veur). Mennet da ren ar vuhez a benitiourez e teuas d'ar Arvorig hag e voe lazhet e-kichen Begnen gant an tirant Nezan he c'hoantae. He fenn etre he daouarn ez eas betek Noyal-Pondivi lec'h ma vez kehelet en iliz parrez hag en ur chapel gaer war ar maez.

- War-dro 450, e-kichen Obar Dheathain e Bro-Skos, **sant Palladius**, eskob, bet kaset gant ar pab Selestin, abostol en Iwerzhon hag e hanternoz enez Vreizh. E touez e ziskibled e konter sant Solen (kv *St-Solen* e bro-Zol), sant Servan ha sant Ternan. Hemañ a vije bet eskobet gantañ e 432 pa varvas sant Ninian eskob kentañ ar Skosiz.

- En Iwerzhon, e 734, **sant Flann**, manac'h.

- En Iwerzhon, **santez Eithne**, maouez santel.

## D'ar 7 a viz Gouere

- War-dro 215, **sant Panten**, uheldad Aleksandria. Hag eñ da gentañ prederour stoikour e voe gonezet d'ar C'hrist hag ez eas da veleg. Mont a reas da avielañ betek broioù pellañ ar Reter ha deuet da vezañ uheldad a ziazezas ar greizenn kelenn prederouriezh ha doueoniezh anavezet evel "Skol Aleksandria".

- E 695, e Eboriacum e Bro-Melda (hiziv Meaux) e Neustria, **santez Edelburga**, abadez manati Faremoutiers.

Merc'h roue Angled ar Reter e roas klod da Zoue dre he finijenn hag he glanded.

- E 706, e Winchester, **sant Hed** (Hedde), eskob Saksoned ar C'hornôg.  
Den leun a furnezh, e treuzkasas eus Dorchester da Winchester korf sant Birin, abostolour ar vro hag e tiazezas e sez eno.

- E 787, **sant Willibald pe Guilbaud**, eskob, mab sant Richarzh roue sakson ar Wessex, breur sant Winibald ha santez Walburg.

Gant e vreur hag o zad ez eas da birc'hirinañ da Roma ha war a hañval e kendalc'has eñ e unan betek an douar santel ma lezas un danevell eus e birc'hirinadenn. War-dro 738 ez eas da gaout e genderv Winfrid alias sant Bonifacius ma voe beleget gantañ hag eskobet evit sez Eichstadt e Baviera a avielas.

- E 1304, e Perugia, **ar gwenvidig Benead XI**, pab.

Mestr-Jeneral Urzh ar Brezegennerion e oa pa voe diuzet da bab e 1303. Leun a vadelezh hag a guñvder e warezas peoc'h an Iliz hag e labouras da adsevel ar reoliadur.

- E 1591, e Bro-Saoz, **ar sent Roger Dickinson**, beleg, ha **Raoul Milner**, labourer douar ha tad a diegezh.

Barnet d'ar marv en abeg d'o feiz e voent krouget e Winchester da vare ren Elisabeth I<sup>añ</sup> a Vro-Saoz. War un dro ganto e reer koun ivez eus ar **gwenvidig Laorañs Humphray** a voe krouget eno d'un deiz n'eo ket bet resisaet.

- E Breizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Tei**, manac'h, diskibl sant Gwennole kehelet dreist-holl er C'hab-Sizun.

- E Breizh ha bepred er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Krizen**, manac'h a vije bet keneil sant Tei.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> pe VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Non pe Nonna**, eskob iwerzhonat deuet da Vreizh lec'h ma voe penitiour.

Patrom iliz Penmarc'h. Roet en deus e anv da Logonna-Kimerc'h, Logonna-Daoulaz.

- En Iwerzhon, er VI<sup>vet</sup> kantved, **ar sent Medran ha Odran**, breudeur o-daou, diskibled sant Kieran Saighar.

- En Iwerzhon, e 792, **sant Maelruan**, eskob abad Tamlachta e-kichen Dulenn.

Strivañ a reas evit al liderezh, kehelerezh ar sent, kenurzh ar vuhez vanac'h. Gant e ziskibl sant Aongus e skrivas ar reolenn *Céilí Dé*, "Kileed Doue".

- E Naoned : **Treuzlec'h relegoù sant Felis**.

## **D'an 8 a viz Gouere**

- Er I<sup>añ</sup> kantved, **sant Aquila ha santez Prisca pe Prsilha**, priedoù santel, diskibled sant Paol. Yuzevion e oant, staliet e Roma lec'h ma fardent teltennoù. Skarzhet gant Dezvenegezh Claudius ez ejont da gKorintoz lec'h ma rojont bod da sant Paol a labouras ganto hag a vodas en o zi ar gumuniezh kristen. Meneget e vezont e meur a lizhiri an Abostol.

- War-dro 303, e Kaezarea Palestina, da-geñver kentañ heskinadeg Diocletianus merzherenti **sant Prokopus**.

Hervez an istorour Euzebios e oa genidik eus Jeruzalem hag e veve evel ur penitiour. E zeskadurezh e-keñver ar bed a oa izel, met Komz Doue a oa e nerzh. Dibennet e voe goude bezañ embannet dizaon e feiz dirak ar barner Fabianus.

- War-dro 303, e Sardinia, merzherenti **sant Palmerio**.

Penitiour e oa e Villanova Monteleone pa voe kaset dirak ul lezvarn abalamour d'e feiz, skourjezet ha lazhet. E relegoù a voe kaset da c'hGhilarza.

- E 885, **sant Hadrian III**, pab.

Strivañ a reas da adunvaniñ Iliz Kêrgustentin gant Roma. E-doug ur veaj davet Bro-C'hall e kouezhas klañv hag e varvas evel ur sant e bourc'h Spilamberto en eskobiezh Modena en Emilia. Sebeliet e voe e manati Nonantola.

- E 975, distro da zoue ene **sant Edgar an Habask**, roue Angled ar Reter.

E-pad tri c'hwe'h bloaz e renas o tiskouez furnezh ha santelezh.

- E 1153, e Trivoli, nepell diouzh Roma, **ar gwenvidig Eujen III**, pab.

Tizhet gant prezegerezh sant Bernez e kuitaas kabistr iliz-veur Pisa en Italia evit mont da abati Claravalis. Deuet da vezañ abad Trefontana war dreuzoù Roma e voe diuzet da bab d'ur mare diaes a zispac'h politikel. Broudañ a reas an eil kroaziadeg.

- E 688, merzherenti **sant Tonan**, Iwerzhonad, diskibl sant Killian, abostolour Frankonia.

- E 689, merzherenti **sant Killian** (Iw. Cillin), manac'h iwerzhonat, eskob.

Avielañ a reas Germania hag e voe drouklazhet e Würzburg gant daou geneil dre ma voe kavet re strizh e brezegerezh a-fet buhezegezh.

- Er VI<sup>vet</sup> kantved, en Devon e Bro-Saoz, merzherenti **santez Urizh**, bet gounezet d'ar feiz gant sant Kae.

## D'an 9 a viz Gouere

- Er VII<sup>vet</sup> kantved, e Bro-Saoz, **santez Everild** (Everildis, pe Averil), abadez.

Merc'h ar roue sakson Kinegliz a Wessex e tizoloas karantez ar C'Hrist pa voe badezet he zad gant sant Bertin hag ez eas da leanez. Resev a reas ar ouel eus daouarn sant Wilfrid eskob Evrog a roas dezhi un tamm douar evit sevel ur manati.

- E 1572, e Brielle en Izel-Vroioù, merzherenti **sant Nicholas Pieck**, beleg, **hag e geneiled**, anezho 8 beleg frañsiskan eveltañ, ur chaloni reoliek eus Sant-Eosten, ur dominigad, daou bremontad, beleion ha leaned all eus Gorcum. Harzet pa gemeras ar galvinourion ar gêr-se digant ar Spagnoled e tiwaskjont jahinerezh hag e voent krouget evit o fealded ouzh Iliz Roma hag o feiz e bezañs wirion ar C'hrist en Eukaristiezh.

- E 1727, e Tiferno en Ombria, **santez Veronika Giuliani**, abadez manati ar Gabusinezed.

Aotreet e voe dezhi dougen kleizennoù ar Basion da Wener ar Groaz 1697.

- **Merzherezed santel Kêr Orange**, anezho 32 leanez eus rannbarzh Avignon, lakaet d'ar marv e 1794. Barnet d'ar marv dre m'o doa "*c'hoantaet diskar ar Republik dre an diboellkredouriezh hag ar vrizhkredoueriezh*" diouzh o barnidigezh e tiskouezhjont feiz ha kalonegezh dreistnaturel betek an dibennerez.

- **Sant Eosten Zhao Rong**, ar c'hentañ beleg sinat marvet evel merzher e 1815, **hag e 119 kompagnun, hag ivez holl ar verzherion** lakaet d'ar marv e Bro-Sina etre 1648 ha 1930, en o zouez beleion, leaned, liked ha bugale lakaet d'ar marv *in odium fidei*, bet santelezh et holl war un dro d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Here 2000 gant ar pab Yann-Baol II.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> kantved, **sant Kiriav**, penitiour e Plounerin, keneil sant Kemev, eskob marteze.

- En Iwerzhon, **sant Garvan**, manac'h, a savas un iliz a zeuas da vezañ Cill Garbháin e-kichen Ciarrai.

- D'an 9 a viz gouere 1900, e Sina, e rannvro Shanxi, merzherenti **santez Mari a Santez-Natalia, Janed-Mari Guerquin** (Gwerken) eus he anv plac'h, ha **santez Mari a Sant-Just, Anna-Frañseza Moreau** eus he anv plac'h, a-gevret gant pemp leanez all eus Frañsezadezed Misionerezed Maria Ploufragan ha kristenion da-geñver emsavadeg ar vBoksered.

Janed-Mari Gwerken a oa bet ganet d'ar 5 a viz Mae 1864 e Benac'h e Bro-Dreger ha bet eo bet o chom e Pluzuned. Anna-Frañseza Moreau a oa bet ganet d'an 9 a viz Ebrel 1866 e Rodent e Bro-Naoned.

### D'an 10 a viz Gouere

- War-dro 164, e Roma, merzherenti **ar sent Genver, Felis, Fulub, Silven, Aleksandr, Vital ha Marsial, hag int 7 mab santez Felisite**.

Da vare heskinadeg Marcus Aurelius Antoninus e voent amprouet gant er prefed Publius a reas e seizh gwellañ evit o lakaat da azeuliñ ar fals doueoù. Dre ma talc'hjont d'ar feiz, annouget gant o mamm, e voent lakaet d'ar marv : Genver, dispennet e gorf a daolioù skourjez ; Felis ha Fulub, lazhet a daolioù bataraz ; Silven, taolet eus un uhelenn ; Aleksandr, Vital et Marsial, dibennet o zri.

- En III<sup>de</sup> kantved, e Roma, da vare heskinadeg Valerianus, merzherenti **ar santezed Rufina ha Secunda**.

Emañ o c'horfoù e-kichen chapel-vadez Sant-Yann Laterano.

- E 1860, e Damask, **ar gwenvidig Emmanouel Ruiz** ha e geneiled, anezho pemp beleg ha daou vreur frañsiskan, ha c'hoazh tri breur maronat.

Un strollad Turked baraned enep ar gristenion en em riklas er gouent frañsezat hag o jahinas betek ar marv.

- En Naoned, e 649, distro da Zoue ene **sant Pasker**, eskob e Naoned.

Gervel a reas sant Ervelen gant daouzek manac'h o tont eus abati Fontenelle evit diazezañ ur manati war enezenn Indr. Eno e tremenas an darn vuiañ eus e amzer o lodennañ buhez ar venec'h.

- E 662, **sant Eton**, manac'h iwerzhonat, abostolour an Artez hag an dTerascia (Thiérase).

### D'an 11 a viz Gouere

- E 155, **sant Pius I<sup>añ</sup>**, pab. E-doug 15 bloavezh e babelezh, da vare Antonin an Deol, e rankas difenn ar reizhkredenn enep an nevezegh dasparzhet gant Marsion.

Anavezet en deus sant Justin. Bez' e vefe breur Hermas aozer *Ar Pastor*.

- D'an 21 a viz Meurzh 547, da zeiz treuzlec'h e relegoù, gouel **sant Benead** (Benniged, Binidig), abad Monte-Casino en Italia, savour Urzh ar Veneadiz, uhelad menec'h ar C'hornôg.

Ganet e Nursia en Ombria, edo gant e studioù e Roma pa zilezas ar bed evit mont da benitiour e Subiaco gant ar c'hoant "*da blijout da Zoue hepken*". Diskibled a zeuas davetañ hag e tiazezas manati Monte-Casino. Skrivañ a reas reolenn ar venec'h lec'h ma ro da anaout "*penaos reiñ klod da Zoue e pep tra*". Dre skignadur e reolenn er manatioù niverus a voe savet dre Europa a-bezh e tegasas berzh da sevenadur kristen ar C'hornôg ken m'eo bet anvet Paeron Europa gant Paol VI e 1964.

- Er VII<sup>vet</sup> kantved, **ar sent Placidius**, merzher, ha **Sigisberzh**, abad.

Diskibl sant Kolomban e savas Sigiberzh ur manati gouestlet da sant Varzhin e Disentis e bro-c'hGrizon war un tamm douar roet dezhañ gant Placidius a reas e soñj lodennañ buhez ar venec'h. Hemañ a voe lazhet avat d'an 11 a viz Gouere 630 gant gouarnour Rhetia enebet ouzh ar manati estren-se. Sigiberzh a varvas e 636 hag a voe sebeliet e-kichen e vignon ha madoberour.

- E 969, **santez Olga**, intañvez dug-meur Kiev, mamm-gozh sant Vladimir.

An hini gentañ eus Ukraina a voe badezet, gant an anv a Helena, e c'houlennas misionerion evit he bro o tigeriñ hent kanttroidigezh pobl Rusia.

- En X<sup>vet</sup> kantved, e Bro-C'hall, merzherenti **sant Berthevin**, diagon ha merzher.

Ganet e rannbarzh Lesawez (Lisieux) en em dennas nepell diouzh Laval da-geñver aloubadegoù an Normaned lec'h ma voe kelenner-ti bugale an aotrou kont. Dre ma tivarc'he lod gant e vertuzioù e voe toullgoafet hag e voe taolet e gorf er stêr a-raok bezañ adkavet ha kehelet gant ar bobl.

- Er bloaz a c'hras 700, e Bro-Loren, distro da Zoue ene **sant Hidulf** (gl.Hydulphe), eskob ha diazeour manatioù.

Genidik eus Bavaria e oa manac'h da-geñver badeziant santez Odila. Galvet gant eskob Trier e voe eskob-ar-maezioù eno a-raok en em dennañ e manati Moyenmoutier nepell diouzh Saint-Dié er menezioù Vosego (Vosges).

- E Breizh, war-dro 878, **sant Emeri**, feizvonnour, marvet en abati Redon.

- E hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos ar reter hiziv), e Glenesk (Caithness), war-dro 610, **sant Drostan**, abad. Da gentañ manac'h beneadat diskibl sant Koulm-Kile (Kolomba) e voe anvet abad Deer e kontelezh Obar Dheathain. Avielañ a reas hanternoz ar vro hag e echuas e vuhez evel penitiour.

- **Diazeziged abati Lanvaoz** e Bro-Wened e 1138.

- **Treuzlec'h relegoù sant Maloù.**



*santez Nolwenn*